

957-ANNA

# Louarnia

fin ha joll !



# KALÉDONIA NEVEZ





DEOMP D'UBER  
UN TAMM TRO  
DINDAN HEOL  
KALEDONIA-NEVEZ !

# Louarnig

Mensuel - N°146 - Novembre/Du 2014  
5 € an niv. / 5€ le n°  
60 € ar bloaz / 60€ l'année  
Niv. CPPAP : 0519 G 80670

Embannet gant / édité par :  
KEIT VIMP BEV 29520 LAZ

Renner an Embann /  
Dir de Publication :

Yann-Fañch Jacq, yf.kvb@orange.fr

Kenurzhierer / Coordinatrice :  
Camille Argouarc'h,  
camille.kvb@orange.fr

Maketenn / Maquette :  
Camille Argouarc'h,  
camille.kvb@orange.fr

Moulet gant / imprimé par :  
SOFAG, BP21 - 29590 AR FAOU

Skeudennoù a zo implijet gant  
Aotre-Implijout Creative Commons  
<http://creativecommons.org/licenses/by-sa/2.0/fr/>

p.1,2 : Deathmask, Olivier Roux (flickr)  
p. 8-9 : Kontadenn dastumet e yezh Pouébo  
gant an Tad Gagnère el levr « Chroniques du  
pays kanak tome 3 - Arts et lettres », kaset  
da benn gant Gilbert Bladimères. Pennad  
François Bogliolo, p. 152, Nouméa : Emban-  
nadurioù Planète Mém, 1999.



P.6-7

## CLAIRE HAG EUGÉNIE

O CHOM E KALEDONIA-NEVEZ



P.8-9

## MOJENN AR MORGAZH HAG AR RAZH

P.4 *titeuf*  
P.12  
Naggeneen

MEURIAD  
P.13-15  
Paotr Louarn



Embannet gant skoazell  
Avec le soutien de :



« Sandrine, perak eo gwenn ha du ar pigned ? »

Louna  
8 vloaz  
eus Louaneg



Ar pigned a vez gwelet war ar maeziou pe e parkoù e kêr. « Pica pica » eo o anv skiantel, netra da welet gant ar *Pokemon* avat.

Perak n'int ket du evel o c'hendirvi : ar brini ?  
N'ouzon ket ! D'az soñj, ken plijet e vefes gant ar pigned ma ne vefe ket gwenn warno ?  
Alies o dez aon an dud rak al lapoused du penn-da-benn, padal n'int ket droukoc'h eget ar re all !

Farsus eo ar biged abalamour ma vezont gwelet war kein ar c'hezeg pe ar saout o klask war lerc'h megeled (seurt laou a chom stag ouzh ar groc'hen) da zebriñ e-touez o blev. A bep seut a zebront ! Amprevaned, greun, frouezh, lastez, loenigoù marvet... hollzebrerien int.

E galleg, pa vez ul loen gwenn ha du (pe gwenn ha gant ul liv teñval all) e vez lavaret eo « pie ». Evel ar saout « pie noir » o chom e Breizh pe c'hoazh evel marc'h Yakari !

Kenavo ar wech all !

Sandrine

# LAÑSET EO HENT AR ROM

PETRA NEVEZ?



DA ADKAVOUT WAR YA-OUANK.COM




Soñj `teus eus Juliette ? Ur bloaz `zo e oa bet kaoz outi e Louarnig. C`hoant bras he doa mont d`ober Hent ar Rom, ar redadeg war bigi dre Meurvor Atlantel. Deuet eo he hunvre da vezañ gwir ! Arc`hant a-walc`h he deus kavet. D`an 2 a viz Du eo aet kuit war he bag vras e-touez rederien all.

ADALEK AN 2 A VIZ DU BETEK FIN AR MIZ



Ha te, dedennet out gant Hent ar Rom ? Peseurt bag eo da hini muiañ-karet ? Respont war ya-ouank.com pe dre bostel da [camille.kvb@orange.fr](mailto:camille.kvb@orange.fr) hag e vo embannet !

## HENT AR ROM 2014 Betek Bro-Wadeloup



© ESRI FRANCE

### GERIOÙ DIAES :

3 543 miles = 873 kilometrad

Lapwent : Pointe-à-Pitre e kreoleg (Kêrbenn Gwadeloup)

Adkelc'hwidenn : Un takad e lec'h m'eo sioul ha brav an amzer. Tro-dro d'an adkelc'hwidenn-se e tro an avel a-du gant an heol.

Redenn : en ur redenn e vez lañs gant ar mor war un tu bennak hep-ken.

Diwask : glav hag avel zo en takad-se, n'eo ket aes bageal e-biou.

# Titeuf

an den a  
daveze tri  
gweneg



Tennet eus « Kenñ Bed Kriz »  
www.b-heol.com  
BANNOÙ-HEOL

\* Kemmeskañ a ra Titeuf hag e vignon ar minoù mengleuz (e lec'h ma vez tennet plom da skouer) gant ar bombezennoù a vez graet « minoù » anezho.

# 21<sup>e</sup>

## SALON MULTILINGUE DU LIVRE JEUNESSE

### SALONS LIESYEZHEK LEVRIOU AR RE YAOUANK

Nouvelle-Calédonie - Bretagne  
Kaledonia-Nevez - Breizh



Pluguffan/Pluguen Kemper

21/22/23 Nov/A viz du 2014

Salon : entrée libre / Mont e-barzh evit netra



Parten. of. Red

KEPHE  
> 88 8 73

## SKRIV DA EUGÉNIE PE DA GCLAIRE !

Dedennet out bet o lenn ar pezh zo bet kontet ganto ? Gellout a rez kas ur gerig dezho ! Marteze e respontint dit hag embannet e vo e Louarnig !

Dre bostel : [camille.kvb@orange.fr](mailto:camille.kvb@orange.fr), treuzkas da bostel a rin.



**CLAIRE**  
11 VLOAZ

**MA YEZHOU** Anavezout a ran un nebeud gerioù e tahitianeg am boa desket gant ma mamm-gozh pe dre kanaouennoù. Saozneg a zeskan er skol.

**MA SKOL** Mont a ran da skol ma c'harter e Noumea. 24 bugel zo em c'hlasad ha 180 em skol.

**MA ZI** En un ti bras emañ o chom etre ar gêr hag ar maezioù. Ur jardin em eus, enni ur wezenn-mangez, gwez-litchi, gwez-sitroñs, gwez-papaiez, bleunioù a bep seurt...

**BOUED LIPOUS** Pizza hag ar frouezh letchi a gavan mat. Ne gavan ket mat al legumaj !

**MA LOENED MUIAÑ-KARET** eo ar c'hezeg ha pesked liesliv an trovanoù.

**C'HOARI** gant ma belo dirak ma zi a blij din, ha c'hoari ar « kem's » gant kartoù.

**NE BLIJ KET DIN** ar spontourien (brezelerien prest d'en em lazhañ pe da lazhañ tud all e anv o mennozhioù politikel pe relijiel).

**PLIJOUT A RA KALZ DIN** mont da vageal. **PA VIN BRAS...** e vin skolaerez.

**UR WECH BENNAK...** em eus kerzhet war ur rae war an draezhenn. Santet em eus he c'hroc'henn c'hleb. Aet eo kuit hep flemmañ ac'hanon ! Aon bras `moa bet !



LETCHI



MERC'HED YAOUANK WAR PLASENN AR GWEZ KOKO E NOUMEA

# NEVEZ !

## EUGÉNIE

8 VLOAZ 1/2

FARDET 'M EUS  
AR SAC'H-MAN  
MA-UNAN


INIZI  
AL LEALDED

ENEZ  
OUVEA

ENEZ  
LIFOU

ENEZ  
MARE

"WAHNGA EO MA  
ANV E DREHUEG,  
MA YEZH KANAK



ER SKOL

**MA YEZHOU** Komz a ran Drehueg ha galleg ha deskiñ saozneg a ran.

**MA SKOL** eo hini ma meuriad. 15 bugel a zo ganin em c'hlas ha 30 em skol.

**MA ZI** zo ur foukenn. Emaon o chom gant ma meuriad anvet Tingeting.

**BOUED LIPOUS** : Kavout a ran mat patatez dous, yod patatez, toazennoù, salad, frouezh, mangez, letchi, ha dour gant sitroñs. Pep tra a gavan mat !



**MA LOENED MUIAÑ-KARET** eo ar pichoned glas, ar mennoù-givri (unan am eus er gêr), al leue Wasiwa (hini ar skol)

**MA C'HOARI** : c'hoari lammañ gant ar sti-renn, c'hoari mell-droad pe volle, c'hoari kartoù, mildammoù, c'hoari ar waz...

**NE BLIJ KET DIN** an

dud a zo meyv, an tsunami, pa vez trouz er c'hlas, pa skriv ma breudeur vihan war ar voger er gêr, pa vezan skoet gant ma breudeur ha ma c'hoar goshoc'h.

**PLIJOUT A RA KALZ DIN** mont d'ar poull-neuil e Noumea pe Lifou ; pa vez baleet gant ar c'hezeg war an Douar-Bras, mont da Noumea, dastum frouezh amañ er meuriad.

**PA VIN BRAS** e vin mezegez-loened peogwir e plij al loened din.

**UR WECH...** eo deuet an abadenn tele « *Le Mot de la Classe* » da filmañ em c'hlas. Filmet e oamp bet hag ur vignonez din he doa lammet gant ar sti-renn e-barzh ar c'hlas evit an abadenn padal eo difennet groñs ! Farsus e oa.

**MA HUNVRE** a zo kreskiñ buan ha mont da gas studioù e Bro-C'hall. Eno e c'hellin gweladenniñ Pariz hag an tour Eiffel !

O ! UR  
PICHON GLAS !



© H. H. H.

# AR RAZH HAG AR MORGAZH

Ur wech e oa ur razh, c'hoant gantañ mont da vageal. A-benn sevel ur vag e krogas e div gorzenn-sukr gant e zent a-benn kleuziañ anezho. O stagañ ar c'horz-sukr<sup>1</sup> kichen-ha-kichen e savas ur vag mod kaledonian.

Ur wech ar gouelioù gwriet e roas lañs d'e vag. Ha setu-eñ o tiskenn gant ar stêr en ur vont war-raok gant harp ur vazh hir. A-daol-trumm en em gavas dirak *Kiak*, ur yar Sultan.

- Da belec'h emhout o vont, Razh ?
- Diskenn a rin betek ar reier koural.
- Gortoz ac'hanon `ta, emeon o vont da gas ma linenn-besketa ganin.

Mont a ra ar yar da gerc'hat he linenn ha dont a ra en-dro da gavout ar razh. Mont a reont dre ar mor asambles ha war o hent e kavont ur gerc'heiz<sup>2</sup>.

- Da belec'h emac'h o vont ?
- Betek ar gouraleg<sup>3</sup>.
- Gortozit, me ivez a zeuio ganeoc'h !


Buan e ya da gerc'haat e linenn-besketa ha dezho da loc'hañ gant o bag adarre. Mont a ra ar vag war-raok buanik, ha benn-ar-fin e tegouezhont eno. Plegañ ar gouelioù hag eoriañ<sup>4</sup> a rejont.

- Ma, eme ar Razh, deoc'h da vont da gregina, me a chomo war ar vag da ziwall outi.

E-keit m'edo an daou labous o pel-laot a-benn pesketa e teuas naon d'ar razh. Ha dre ma oa graet e vag gant korz-sukr, e tebras anezhi tamm-ha-tamm, betek penn. Mont a reas da ziskuizhañ war ur roc'h goude ar pred lipous-se.

E-pad ar mare-se e oa lanv gant ar mor. Degouezhout a reas en-dro an daou beskataer :

- Razh, pelec'h an diaoul emañ hor bag ?
- Naon du em boa. Debret em eus anezhi.
- Hama, kamalad, debret az peus anezhi, met te, n'ez peus ket eskell evit nijal kuit !



En ul lavarout kement-se e nijas kuit an daou labous o leuskel ar paour kaezh razh war beg e roc'h, dour e-leizh tro-dro dezhañ.

Kregiñ a reas da leñvañ, da glemmichal ha da leñvañ c'hoazh.

Klevout a reas ar morgazh an trouziou-se.

- Piv a zo amañ o leñvañ ?

- Me, Razh an hini eo.

- E, o leñvañ emañ ? Petra c'hoarvez ganit `ta ?

- Leñvañ a ran abalamour m'emañ ma daou gamalad o paouez leuskel ac'hanon amañ ma-unan.

- *Buam ! (Biskoazh !)* Troc'h un tamm en da gof evit lakaat da boan da baouez...

Dont a reas tostoc'h eus ar Razh hag e ouzhpennas : « Deus, diskenn ha azez war ma gouzoug. » Diskenn a reas ar Razh diouzh e roc'h ha teurel a reas e bouez war penn ar morgazh.

Loc'hañ a reas ar morgazh da neuial gant ar razh war e benn. A-daol-trumm e teuas

d'ar razh c'hoant da ziskargañ<sup>5</sup>. Hag eñ d'ober war penn an hini madoberour<sup>6</sup>.

- *AELOBOT ! (c'hoarzedennou)*

- Abalamour da betra e c'hoarzhez ?

- Abalamour ma `z eomp buan a-walc'h !

Ar morgazh da vont war-raok adarre, hag ar razh d'en em ziskargañ ur wech c'hoazh.

- *AELOBOT !*

- Abalamour da betra e c'hoarzhez ?

- Abalamour ma `z eomp buan kenañ !

Youl a oa gantañ, mont a reas ar morgazh buanoc'h c'hoazh, ha war an aod e voent erruet

buan. Ur wech ouzhpenn e tisammas ar razh war penn ar morgazh, an hini e oa bet savetaet e vuhez gantañ.

- *AELOBOT !*

- Perak an diaoul emañ o c'hoarzhin c'hoazh ?

- C'hoarzhin a ran peogwir on laouen da vezañ degouezhet !

Lammat a reas war an douar hag e lavaras d'e vadoberour :

- Ac'hanta, Morgazh, sell war da benn `ta, hag e weli perak e c'hoarzhin kement-se !

- *Buane Tiamam<sup>7</sup> !* a lavaras ar Morgazh. Lammat a reas ar Morgazh a-benn redek war-lerc'h ar razh pa `z eas-eñ diwar-wel en un toull bennak, o c'hoarzhin frank abalamour d'e

farsadenn dichek. **GOUZOUT A REOMP  
BREMAÑ EO ABALAMOUR D'AN AFER-SE  
EZ EUS PIKOU TEÑVAL WAR  
PENNOU AR MORGIZHIER...**



#### GERIOÙ DIAES

<sup>1</sup> Korz-sukr : korzenn ur plant a vez kavet sukr enni.

<sup>2</sup> Ul labous bras, dezhañ ur gouzoug hag ur pikos hir.

<sup>3</sup> Kouraleg : loenedigoù a denn ouzh reier war bord ar mor, pesked e-leizh en o zouez.

<sup>4</sup> Eoriañ : chom a-sav, pa vezer war ur vag.

<sup>5</sup> Diskargañ : Staotat pe kac'hat !



<sup>6</sup> Unan a ra ar vad tro-dro dezhañ/dezhi.

<sup>7</sup> « Penn da dad » en ur yezh Kanak, a c'heller treiñ gant : « Biskoazh kement all ! »

Trugarez da Gilbert Bladinières ha da Anne Bihan

Tresadennoù : Gwendal Briec  
www.gwendalbriec.com

Ur « stockman » eo an den-mañ. Diwall a ra ar saout war varc'h ! Saoznek eo ar ger, dont a ra eus Aostralia.




Dit da adkavout

# AR 7 DIFORC'H

etre an 2 foto-se.

## FOTOIOU KOLLET




LEVRAOUEG NOUMEA



ENEZ LIFOU


BAE AR BAOTED



TRAEZHENN VATA, NOUMEA




A-drugarez d'ar gartenn pajenn 6-7, kav-en dro pelec'h e oa bet tennet ar fotoioù-se.




GWELLOC'H EN DIJE KAVET NAGGENEEN CHOM HEY KEJAÑ GANT  
ESTRANJOURIEN, NOAZH PILH EVEL MA OA.

REDEK A REAS BETEK E LOCH D'EN EM WISKAÑ BUAN.




SIWAZH E CHOME AR  
C'HWEZH FLAERIUS-SE  
PEG OUZH E ZILHAD.



GRAET VO GANT AN DILHAD  
MEMESTRA . N'EN DOA KET  
C'HOANT EN EM GAVOUT EN  
NOAZH DIRAK AR RE ALL.



NE OA KET CHALET AR BUCKWOODGENIES GANT AN DUD EN NOAZH.  
KAVOUT A RAENT FENTUS AVAT AR C'HWEZH FALL A STAGE OUZH  
AN DEN ESTREN E FRI RUZ.




UNAN EUS AR BUCKWOODGENIES, AN HINI MELEN HA  
ROUDENNEK E FRI, AR PENN-BRAS MOARVAT, A SEBLANTE  
DEDENNET GANT TOG NAGGENEEN.




PROFAÑ A REAS DEZHAÑ LAOUEN.  
KONTANT-BRAS E OA AR PENN-  
BRAS GANT AR PROF, DAOST D'AR  
C'HWEZH LAOSKET GANT BRAMM AL  
LOENIG..




PEDET E VOE NAGGENEEN DA VONT GANTO.  
KERZHOUT A REJONT BETEK UR FRANKIZENN.  
TRI VIZON A OA O C'HORTOZ ANEZH.



DA BELEC'H E VIJE KASET  
ANEZHAÑ ? NE VIJE KET PELL  
A-RAOK GOUZOUT.







AR GHOUL  
OA GANNIN.

TOUT AN APER-SE  
"EO Gwir."

A-NECHOE E SONTAN EO  
DREOELL PENN-DREBAN...

- PROAL ON  
SUR EZ EO  
Gwir.

MA CHOSE MA SPERED,  
MA PEMP SIVANT, MA  
CHREANNOU...

A YOU'CH DIN  
EZ EO Gwir !

NEUZE E RAN  
TACLAOD-ESSE.

N'INT KET FALL !



HUCHRENNOU  
AN DUJ EN TRON,  
HAG AR GER EN HE FEZH  
A BROU PIN EO Gwir.

NE CHELAN KET  
CHOM HEP KEDON  
ANEZHO.



ECHU EO.  
KET ON.

NERET E  
VEZ PIZH.

SICHALET VEZ  
ANECH.

NE VEZ KET TALET  
OLECH AR GOUANAR  
GANT AR GOUANAR  
AURT.

HA NEUZE ? SANDET  
ON DONVAAT MA  
CHREANNOU DRE  
SISEN GANT LIN  
PANNAD ?



"MA ISTRIZ PA SELL  
A-RACK BEZAD TIZHET  
AR CHOERE  
EZ ANKORREZH  
EN PENN-DREBAN."

"HAG EZ I  
PNAK-WEL  
PA VIKEN."

MA I GALLOUT  
A REZ MONT KUIT  
LOUAREZ.  
"ADREZ PT TREDI DM GREN  
AURT HET HA MA NO VI KET  
PARZ EUS REKRELEZH AN  
PREDRELLANT."

\*Donvaat : evel ma vez graet gant ul loen gouez evit lakaat anezhan da vezan "mignon" gant Mab-Den. Talet : stourmet  
\*An istor gant rouantelezh an tenvalienn kontet amañ a zo bet tennet eus ur vojenn c'hresian gant Orfeüs.

MA, N'EO KET TOUT MET  
RET EO DIN RENKAJ UR  
GUDENNIG A-RAOK  
DISTRÉIN D'AR GÉR.

DONT EN-DRO DA VEZAJ PAOLIG  
SALSEDO JENTLIK, LELLIG E  
GELENNERIEJ, HA DISPLEGAJ  
PERAK N'EM EUS KET EZHOMM  
A LUNEDOU KEN.

HA 'KEN KAZ MA PADFE  
DRE VURZHUIJ  
AR PERZHIOU  
**DREIST-LOUARN**  
-SE DA VIKEN...

NEUZE  
KENKOULZ  
MONT DEZHI  
**DA VAT !**



EZHOMM 'MO  
DEUS UR  
GWISKAMANT...  
... DEUS UR  
MASKL !

UR MENNOZH  
BENNAK  
AM EUS DJA  
EUIT SE.

HA DRE M'EO PAKET  
NEW YORK HA  
GOTHAM CITY GANT  
HARZED DJA...

DISKOUEZ  
A RIN DA  
DORFEDOURIEN  
AR GÉR-MAD...

**PN** EO  
AR MESTR !

C. G. FOUVRE

ECHU EO LODENN 1<sup>AD</sup> ISTOR « NOZVEZH AL LOUARN » !  
AR MIZ O TONT E VO KENDAL'CHET GANT AR PENNAD 3... GORTOZ PELL, GORTOZ GIWELL !

UN NIVER...

# 160

zo an niver a otoioù a c'hell en em gavout kichen-ha-kichen war un hent e Bro-vBrazil !

# KRAK HA BERR

Traouigoù pe titouroù fentus !

Dit da ginnig ivez !  
Kas ur postel da  
camille.kvb@orange.fr

UN DEIZ...


D'AN **28**  
A VIZ DU




Klask a reer chom hep prenañ tra ! *Black friday* a vez lâret e saozneg, ar gwener du.

## HA GOÛT A REZ...

An hanter deus an dud war an douar n'o deus pellgomzet gwech ebet !



## PETRA EO ?!



Ul logedenn dindan un fog-toseg gwelet deus an nech.

## SIFROÙ ROMAN

IX X

VIX XI

Dit da lakaat en urzh !

Respost : IX, X, XI

## YEZH AR-SINOÙ

Evit sinañ :  
« unan hag a c'hell klevout »

Kae deus da skouarn betek da lagad gant da viz-yod ha da viz-meur savet.



## BRAMMOÙ




Ul louf a ra c'hwezh, hag ur bramm a ra... ?

... mezh !

## DIVIN'TA

Da beseurt goulenn ne c'hellez ket respont hep kontañ gevier ?



« Hag o kousket emañ ? »